

—: SILVESTRIK :—

Andantino.

E - tre cha - pel sant Ef - flam ha tes - sen Me - ne Bre 'zo
 eun of - fi - ser yaou - ank, gan - tan eur pez kle - ze, 'zo
 eun of - fi - ser yaou - ank o se - vel eun ar - me, Me
 'meuz eur mab Sil - ves - trik a la - var mont i - ve.

1

Etre chapel Sant Eflam ha tosen Mene Bre,
 'Zo eun offiser yaouank gantan eur pez kleze,
 'Zo eun offiser yaouank o sevel eun arme,
 Me 'meuz eur mab Sylvestrik a lavar mont ive.

2

« Sionaz, aotrou Kabiten, 'meuz ken mab nemetan,
 Ganen c'honi 'po 'r vadelez da lezel anezan. »
 — Allaz! tad koz maleuruz, ar marc'had 'zo sinet;
 Touchet en deus an arc'hant, d'an arme 'rank kerzet.

3

A-berz an tad glac'haret, var dachen ar vrezel,
 Eun dervez eul labousik a nij a denn-askell:
 — « Deiz mad d'eoc'h c'honi, Sylvestrik, deiz mad ha levenez,
 Penaoz ema ho yec'hed, ho nerz hag ho puez? »

4

— Disken 'ta, labous bihan, disken var da zaou droad,
 Ma skrivin d'it eul lizer da gas d'ar gêr d'am zad:
 « Yac'h eo ho mab Sylvestrik, yac'h ha laouen bepred;
 » Dizale e fistroio var-zu e vro garet. »

5

An tad bemnoz ha bemdez ne baouez da zonzal
 En e grouadur yaouank en arme e Bro-C'hall;
 E kreiz an noz, ec'h hunvre hag e stag da ouela:
 « Aotrou Doue, Sylvestrik, petra deu da vezal »

6

Pa oa an tad glac'haret oc'h ober e glemmou,
 Setu e vab Sylvestrik 'toul an hor o selaou;
 « Paouezit, tad ankeniet, paouezit da ouela;
 Sellit, ho nfab Sylvestrik 'zo digouezet ama! »

Dastumet gant P. Tr.